

HON TIEGEZH

"EN HOR YACUANKIZ EO BET
FIZIET GANT DOUE
AMZER-DA-ZONT HOR BRO". Y.V.P.

Stagadenn "EMGLEV AN TIEGEZHIOU"

Supplément à WANIG & WENIG,

da WANIG & WENIG, Niv.42

N° 42, avril 1967.

EBREL 1967 NIV.2

EMVODOU DA ZONT. - SUL 25 A VEZHEVEN: Emglev an Tiegezhioù a genero perzh e "Devezh ar Vro" war dachenn-emgann Ballons (Bains-sur-Oust).

- SUL 6 A VIZ EOST : Bodadenn Veur Emglev an Tiegezhioù e-lec'h ma vo Kamp ar Vrezhonegerien. Trugarez dezhañ !

Kasit adalek bremañ ho soñj ha kinnigoù diwar-benn ar vodadenn-se.

Skrivañ da : Emglev an Tiegezhioù, 30 place des Lices, ROAZHON, 35.

V-V

EMVOD ROAZHON - SUL 27 A VIZ DU 1966.

Tregont den a oa deut d'an emvod-mañ; dres a-walc'h evel hini Gwened. An dud yaouank hag ar vugale e oa an niver brasañ ganto (hanter evit hanter e oa bet e Gwened).

En em gavout a reas an dud e chapel Leanezed Stez Klara, straed Brizeug, evit oferenn ar vrezhonegerien. War gresk eo aet niver an dud a zeu d'an oferenn vrezhonek abaoe miz gwengolo. Prezegen, lannnadurioù ha kantikoù a zo aet war wellaat. Anat eo araokadennoù er generien renet gant an Ao. Elgouac'h, blenier-kan ampart. Pleustradeg war ar c'han a vez bep sadorn da 18 eur 30, leugêr al Lisoù.

Da greisteiz nemet dek e voe kroget gant an Emvod e sal vras "Fourn ar Chapistr". Da gregiñ gant an displeg e voe lennet gant an Ao. Langleiz ar pennad-skrid "Emvodoù" bet emb nnet da c'houde war ar Bed Keltiek, niverenn miz genver. Kaset e oa bet dimp gant Roparz Hemon. Ur pennad all, aozet gant Youenn Souffez-Després, a voe lennet gant G. Cherel.: "Posub e c'hellfe bezañ bodañ darn eus ar Vrezhonegerien e pep kêr, sevel kreizennoù buhez o vont en-dro dre implij ar yezh. Petra ober er c'hreizennoù-se ? Forzh petra gant ma vo dre ar brezhoneg: judo, kentelioù tresañ, seniñ, gwriat, bijskrivañ, dañsoù, prejoù, prenañ bevañs a-stroll... Dre vras, pezh a blijjo d'an dud. An Itron a Roc'han-Chabot a zisplegas doareoù... hag ober Brezhoned Reter ar Vro gant ar strollad "Rénovation Bretonne": "Ur strollad a Vreizh-Uhel eo. Ar yezh n'eo ket evidomp an dra pouezusañ da bleustriñ warni... Ne fell ket dimp "dichoual" an dud dre c'houlenn outo muioc'heget n'eo poellek en ober... An istor an hini eo en deus skoulmet liammoù didorus ha savet ur bobl nemeti. Nag a Vreizhiz taer a zo savet a-douez Breizh-Uheliz ! Nag a zarvoudoù brudet a zo c'hoarvezet e Breizh-Uhel ! An unvaniezh-se a zoug alies Breizh-Uheliz da zeskiñ ar Brezhoneg o soñjal ez eo drezañ dreist-holl e vez komprenet mat hor sevenadur, hag, erfin, tizhet mat hor pal. Klask a reomp, evit bremañ, lakaat Breizh-Uheliz, dreist-holl ar re yaouank, da gemer interest en istor ha lennegezh Breizh, gant ar spi e savo, e lod anezho, ar c'hoant da vont pelloc'h... da vont betek deskiñ o yezh vroadel." Goude un tamm kendiviz, e voe klozet lodenn gentañ an devezh gant displeg poellek-kenañ an Ao. Langleiz ha kan Gwir Vretoned ha Bro Gozh va Zadoù.

Da un eur e voe ar pred. Krampouezh dous (gwinizh) ha krampouezh sall (gwinizh-du) gant a bep seurt kaotigell, pastez, anduilh, silzig, da vezañ dibabet hervez rolloù-meuzioù brezhonek bet aozet a-ratozh evit an devezh.

